

## CANTIC

### SANTEZ ANNA VENED.

*Var eun ton ancien.*

**M**E ho suppli, tud devout, da zelaou a galon  
M'eur C'hantic spirituel gant güir devotion,  
A zo grêt en gloar Doue hac e Vam ar Verc'hez,  
D'an Itron Santez Anna, hor güir advocadez.

Mes qent avanç davantach, goulennomp ouz Doue  
Ar zicour, an asistanç, sclêrijen eus an êe,  
Dre intercession ar Verc'hez hac ar Speret-Santel,  
Da gomposi eur C'hantic da gana en Breiz-Izel.

Megomza eur plaç santel hac ancien meurbet,  
Frecantet a bep contre gant an dud afflijet,  
A Leon hac a Dreguer, a Guerne, ha Goenet,  
A hêvar c'horn ar broviñç e teu pelerinet.

Pebes douçter a zanter, hac ive pebes joa,  
Pa vel ar belerinet ilis Santez Anna!

Anconac'hât è souden ezomou ha scuisher;  
 Nezônjer muieusouffret na tourmant na mizer.

Oc'h antreal en ilis, pebes contantamant  
 A zant eun ene christen eno en un instant!  
 O Itron Santez Anna! emeàn, a greiz halon,  
 Me en embrosterd d'hotreid gant güir devotion.

Sellit endro d'au ilis eun niver tolenou  
 Offret da Zantez Anna en faveur ar vœuyou  
 Grêt er moment an danger, hac a zo exocet  
 Dre c'halloud Mam ar Verc'hez e pévar c'horn ar bed.


Dezir a meus, Bretonet, da zisclèria brémâ  
 Ar miraclou admirabl a ra Santez Anna:  
 En escopti a Voened, tostic da guêr Alre,  
 E ma'n tenzor precius d'or c'horf had'hon ene.

Janned ar Bescond hanvet, a escopti Goened,  
 Espaç demeus a zeiz vloas privet eus ar c'herzet,  
 En em goestlas gant fizianç ha güir devotion  
 Da vont da Zantez Anna-eus a greiz e c'halon.

Casset voe en eul letier gant daou den asistet,  
 Rentet en Santez Anna, pa e d'oa deziret,  
 Evel ma yâs en ilis dirac Santez Anna,  
 E quittas he branelliou, ma savas en he za.

Divale a ras d'ar guêr hep den d'e asista,  
 E branellou a lêzas dirac Santez Anna:  
 E maint c'boas en ilis, peb den ell o güelet;  
 Meulet ravezo Jesus hac e Vam beniguet.

Mac'harit Costiou ive, a guichen Qimperle,  
 Zobet pell bras languissant chomet vare güele;  
 Mes e zad a bromettas eviti eun novet



En ilis Santez Anna, m'e devize yec'het.

Varben daou zevez goude ar plac'h-mâ a zavas.  
Admirompoll, christenien, ur miracl zo qer bras  
E deus grêt Santez Anna en qichen Qimperle,  
En andret eur plac'h yaouanc e fede nôs ha de.

A Vrest eur zoudard devot, e hano St-Amand,  
O tremen ebars eur c'hoad eo em gavas gantan  
Pêvar forban debordet var an hent o laeres,  
Hac a c'houlennas outân e yalc'h pe e vutç.

Ar zoudard, pa o c'hlêvas, a lavaras dezo :  
Me a zo enn tremeniat, ne meus qet a vadou,  
Hac a ya da bardona da Zantez Anna Voened,  
Mar be madelez Doue va lêzel en yec'het.

Ar mestr demeus al laeron a zistroas outâ  
Gant eur vistolen ganguet, en esper e laza ;  
Evel ma sônjas tenna, e vrec'h outâ' zonnas,  
Ar vistolen eus e zorn d'an douar a goezas.

An tri laër all pa veljont voa brec'h o mest sonnet,  
A c'houlen ouz ar zoudard hac ên d'oa e sorçer.  
Salocras sur, cmeân, n'en don qet eur sorçer ;  
Jesus ha Santez Anna am preserv diouz maler.

Eus a guever Rosternen eur meliner yaouanc  
P'oa o lemma e velin e toras ar palanc,  
Ma chomas etre daou ven, ma sônjet voa lazet ;  
An Itron Santez Anna e deus er prezerver.

Diouz ar mintin pa zave ha pa zê da gousqet,  
E pede Santez Anna gant eur galon barfet  
D'e breservi diouz maleur ha goal chanç er bed-mâ ;  
Chonçet en devoa da vam Itron Santez Anna.

Mari ar Peuziou hanvet, eus ar guêr a Alre,  
 Er spaç eus a c'hoec'h devez e poan a vùgale,  
 Gant e fried voe goestlet dirac Santez Anna,  
 Neuze souden e c'henas eur mab ar vaillanta.

Hac ur vaguerz yaouanc, o vag'urc'hrouadur  
 Da ur bourc'his a Naonet, comprenit ar maleur!  
 Eun devez o sortial, allas! ne zônje qet,  
 Ma lezas ar c'hrouadur en e gavel cousqet.

O pebez tristidiguez, glac'har, spont hac horror!  
 Pa zistro ar vaguerz da zigueri he dôr,  
 Pazellas ouz ar c'havel, ar c'hrouadur voe ennàn  
 Contamet gant eur pennoc'h an anter aneàn.

Hac hi comañç da grial : Itron Santez Anna,  
 Petra' meus-me da ober? mancout a ràn simpla.  
 Allas! me a vel patant e vîn sur punisset  
 Balamour d'ar c'hrouadur a zo ganén maguet.

Ar bourc'his qenta' glêvas, a laq e c'hêmeret,  
 Rentet er memes amzer er prison a Naonet;  
 Souden voe grêt e froces vit bea punisset,  
 An Itron Santez Anna e deu-hi preservet.

Lennet e voe dirazi gant rigor ar setañç,  
 Cunduet gant ar bourreo da guichen ar potañç,  
 Ha pignet e voe gantàn betec ar vas huella;  
 Eno ec'h apparissas neuze Santez Anna.

Courach, emezi, va merc'h, n'ho pezo drouc ebet;  
 Ar c'hrouadur a zo yac'h en e gavel cousqet;  
 Me a zo Santez Anna, ho cuir Advocades,  
 Ahoec'h an oad a zeiz vloas em pedec'h alies.

Ar bourc'his-mâ pa glêvas voa o vab ressuscitet,

A gommanças da grial evel eun den sollet,  
 En em strincas d'an daoulin evit goulén pardon  
 Ouz Doue ha Santez Anna eus a greiz e galon.

Me ê an den mizerabl ha ne veritàn qet  
 Bez' amâ en ho presañç d'an daoulin prosternet;  
 Me raï amand enorabl en plaç ar vagueréz,  
 Hac a c'houlénno pardon eus va fallagries.

Ar bourc'his a yas neuze da dy eun ofreber,  
 Laqat ober en arc'hant form e grouadur qer,  
 Evit digas en offranç da ilis Santez Anna,  
 A veler c'hoas en tenzor en heur eus a vremâ.

Ha Catelar Bristhanvet eus arguêra Henbond,  
 A goeas bars er rivier, ma yas dindan ar pont;  
 Gant an doue e voe ruillet, ha ma voe dindanna  
 No pe zeg heur horolach abars dont anezâ.

E mab qenta ma clêvas e voa e vam coeet,  
 D'an Itron Santez Anna gantâ a voe goestlet  
 Demeus a drêgont diner, eun oferen novet,  
 Ha dre c'hraç Santez Anna ne devoe drouc ebet.

Eur vatimant marc'hadour o tistrei à Vourdel,  
 Forcet dre eur bar toumant, tolet var eur rohel,  
 Hac a voe etre'n daou doue ar spaç a dri devez,  
 Ma sônje'r vartolodet e coljent o buez.

Ar c'habiten scuizet bras hac ar vartolodet,  
 Rezolvét oll da vervel eus a greiz o yec'het,  
 En em strincjont d'an daoulin da grial, da oela,  
 Ouz en em recomandi d'hor Mam Santez Anna.

Abars eur c'bart-heur goude ober o orêson

D'an Itron Santez Anna eus a greiz o c'halon,  
 Ar môr ouz en em zével, al lestr qerqent rentet  
 Dre eur miracl ar brassa er rivier an Naonet.

Eur vatimant perisset e bars creiz ar môr don,  
 An equipach oll beuzet, exceptet ar patron,  
 Pehini var eur planqen a chomas seiz devez;  
 Mes dre c'hraç Santez Anna e sovetas ewez.

Da ilis Santez Anna e roas en present  
 Arsom demeus a vil scoët, eur galonen arc'hant,  
 Hac ouspen ze eun daulen güernisset eus a aour,  
 Ha pévar güennec varnuguent a roas da bep paour.

Incapl'ôn, christeuïen. da zisclêria bremâ  
 An nombr eus ar miraclou a ra Santez Anna  
 Var ar môr, var an douar, en qement plaç m'e feder:  
 Supplia a ra Jesus da bardon' d'ar pec'het.

Santez Anna'ro certen ar güelet d'ar re dall,  
 Ha d'ar re vud ar parlant, clêvet ar re vouzar;  
 Remed d'ar re afflijet, d'ar re gâñ ar c'herzet,  
 Soulaj d'ar vugaligou, ha d'an dud elan yec'het.

Amâ e mâ ar feunteun eus a c'hraçou Doue,  
 A recour yec'bet d'ar c'horf ha bue d'an ene,  
 O tout da gôves enni ha da gommunia  
 D'an deiziou a zo choazet evit e bizita.

Bep meurs qenta eus ar mis e caner an ofiç  
 En ilis Santez Anna, ouspen ar sacrific,  
 Evit consolation an oll belerinet  
 A deu da Zantez Anna gant eur galon barfet.

Ar c'hoec'hvet deiz varnuguent demeus a vis güere  
 E mâ Gouel Santez Anna hae ar solanite.

Gant ar Pab e zeus enni en deiz-se accordet  
An Induljançou plenier, remission d'ar pec'het.

Piou benac a gôvessayo hac a gommunio  
En ilis Santez Anna en deiz-se, a c'honeo  
Pemp cant devez a bardon, o tont da lavaret  
Pemp *Pater* ha pemp *Ave*, recita ur chapelet.

O Itron Santez Anna! ni ho suppli hac ho ped,  
Pedit evidomp Jesus en pales an Drindet,  
Evit, goude hor maro, ma zaitp oll da repos  
Gant ar Zent hac an *Æles* en gloar ar Barados.

A dost da Zantez Anna, sônjit, ô christenien!  
Ezeus eur plaç a c'hlac'har, hanvet *Parq ar Verzerien*.  
O quittäat Santez Anna, ho qeitr troet d'an ilis,  
Lavarit a greiz calon : *Pater, De profundis*.

---

*Pedennou hac Orêsonou a dle ar Gristenien da lavarar, pere a zoug devotion da Santez Anna.*

**H**O pezit sônj, ô Santez Anna, Mam a gouso-  
lation, penôs ne voe clêvet biscoas den o  
lavarat e vije bet dilêzet na refuset, ma teuje  
en afflictionou d'hoc'h invoqi ha d'ho pedi, ar  
galon touchant ha penitant en deveus bet re-  
cours dêc'h, hac en deus goulennet hoc'h asis-  
tanç. Ho pedennou a deu da veza exocet gant  
hor Zalver Jesus-Christ; rac-se e qemeromp  
esperanç ennoc'h evel a ra an dud slân pere a  
deu d'ho pisita. Ni en em adress dêc'h eus a  
greiz hor e'halonou, hac ho reclamomp hum-

blamant. Accordit-demp ar c'hraç da ellout  
eur vech jouissa eus ar gloar eternal. *Amen.*

*Q*ement güech ma leverfot an Orêson a zo ãma  
varlerc'h, e c'honzfot trêgont mil bloas a  
bardon, accordet gunt an Tad Santel ar Pab  
*Alexandr da guement Christen a zo er bed.*

**A**ve, gratiâ plenâ, Dominus tecum : tua gra-  
tia sit mecum : benedicta tu in mulieribus,  
et benedicta sit Sancta Anna, Mater tua, ex  
quâ sine maculâ et peccato processisti, Virgo  
Maria; ex te autem natus est Jesus-Christus,  
Filius Dei vivi. *Amen.*

*P E D E N.*

Done oll-galloudus hac eternal, c'houi pe-  
hini oc'h eus deurvezet rêi Santez Anna eürus  
evit Mam da Vam ho Mab unic, grit, ni ho  
suppli, eñ eur ehorie memor dre eun devotion  
fidel, ma obtenimp dre e meritou ar boneur  
eus ar vuez eternal, ô c'houi pehini a rên  
epad an oll amzeriou.

*F I N.*




---

E Montroulez, e ty LÉDAN, Impr.-Libr.